


# DU AN NOZ

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg




1. Du an noz, teñ - val an deiz, On daou - la - gad 'zo klañv;  
 2. Koue - za 'reom war bord an hent, 'Vel tud gwall - va - ha - gnet;  
 3. Dond a reom da ve - za mud, Gand aon di - rag ar béd;



1. Pa - re - it on dal - len - tez, Hag e pa - ro an hañv.  
 2. Or fi - ziañs a deuz ker - kent Ha ma ve - zom koue - zet.  
 3. Hag e le - zom gwas - ka tud, En eur zi - wall or brud;



1. Skla - set chom c'hoaz or c'ha - lon; Grit deom mou - ga péb aon,  
 2. Grit deom gwe - led galv ho torn O tond be - teg en - nom,  
 3. Grit deom kaoud ka - lon a - walc'h 'Vid ma vo en on touez



1. Ma c'hel - lim ka - red da vad Or breu - deur hag on Tad.  
 2. Pa zi - gouez gand eur mi - gnon Kin - nig si - kour e zorn.  
 3. Péb dén breur d'an oll dud all, D'ar paour ha d'an es - tren.

1. Du an noz, teñval an deiz,  
 On daoulagad 'zo klañv ;  
 Pareit on dallentez,  
 Hag e paro an hañv.  
 Sklaset chom c'hoaz or c'halon ;  
 Grit deom mougá péb aon,  
 Ma c'hellim kared da vad  
 Or breudeur hag on Tad.
2. Koueza 'reom war bord an hent,  
 'Vel tud gwall-vahagnet ;  
 Or fiziañs a deuz kerkent  
 Ha ma vezom kouezet.  
 Grit deom gweled galv ho torn  
 O tond beteg ennom,  
 Pa zigouez gand eur mignon  
 Kinnig sikour e zorn.
3. Dond a reom da veza mud,  
 Gand aon dirag ar béd ;  
 Hag e lezom gwaska tud,  
 En eur ziwall or brud ;  
 Grit deom kaoud kalon awalc'h  
 'Vid ma vo en on touez  
 Péb dén breur d'an oll dud all,  
 D'ar paour ha d'an estren.

## NOIRE EST LA NUIT

1. Noire est la nuit, sombre le jour,  
 Nos yeux sont malades,  
 Guéris notre aveuglement  
 Et brillera l'été.  
 Notre cœur reste encore gelé,  
 Fais-nous étouffer toute peur,  
 Que nous puissions aimer vraiment  
 Nos frères et le Père.
2. Nous tombons sur le bord du chemin  
 Comme de pauvres estropiés ;  
 Notre confiance s'évanouit aussitôt  
 Que nous sommes tombés ;  
 Fais-nous voir le signe de ta main  
 Tendue vers nous  
 Chaque fois qu'un ami  
 Nous offre son appui.
3. Nous en venons à nous taire  
 Par crainte du monde ;  
 Et nous laissons écraser les gens  
 Pour n'être pas compromis ;  
 Donne-nous assez de cœur  
 Afin qu'entre nous  
 Chacun se sente frère de tous,  
 Du pauvre et de l'étranger.